

Kaozeadennoù e brezhoneg

D'ar Merc'her 08 a viz Even 2011 deuit d'ober anaoudegezh gant :

Fañch PERU



Evit kaozeadenn diwezhañ ar bloaz eo bet pedet gant KLT **Fañch Peru**, Tregeriad penn-kil-ha-troad ma zo unan. Maer ur gumun vihan a Vro Dreger eo bet Fañch e-pad triwec'h vloaz : Bec'hed, etre Lannuon ha Bear. Dont a ray Fañch da gaozeal diwar-benn e labour e-barzh ar gevredigezh Ar Falz-Skol Vreizh ha dreist-holl eus e labour a skrivagner. Savet eo bet gantañ un ugent bennaket a levrioù e brezhoneg : kronikoù, danevelloù, romantoù berr, barzhonegoù... Displegañ a ray deomp e labour krouiñ en ur lâret gant piv ha gant petra e vez levezonet hag awenet. Ar gaozeadenn-mañ a vo un digarez da Fañch da ziskleriañ deomp ivez an tri levr a zo war ar stern gantañ.

Pub « The Greystones » 13 Hent ar Gar / rue Gambetta – MONTRouLEZ –

02 98 88 15 85

Da 8^h30 noz - Digoust

[Vit gouzout hiroc'h : KLT - 02 98 63 98 79 pe 06 82 77 10 10 / www.klt.fr](http://www.klt.fr)